



Tro ha
Distro



Programm ar rummad troiñ

Ne dalv ket ar skrid-mañ e « gwenedeg » e vo graet get ar rannyezh-se e-pad ar sizhun, nag e vo digomprenabl ar stummour !

1. Paliou ar rummad

En un endro divyezhek, mand eo kreñvoc'h ur yezh evit egile, ni bez afer dalbezha a droiñ ag ar yezh kreñvañ, ha pa vehe termenoù o-unan lies-mat, ma faot deomp implijiñ ar brezhoneg àr ar pemdez.

Ni a lakay ar pouez neuze, ar ble-mañ, àr ar labour **termenografiezh** a vez afer anezhoñ evit troiñ testennoù teknikel, hag ivez evit komz ha skriviñ a-ziàr a bep sort danvez er vuhez pemdez. Soñjit, da skouer, e tud aterset er radio ha ne ouiont ket geriaoueg o zachenn e brezhoneg.

- Gober anaoudegezh get an dermenografiezh hag an troiñ dre vras : talvoudegezh, feson d'ober ha c'hoazh.
- Pleustriñ àr un danvez teknikel pe deknikeloc'h, dibabet get pep unan, ha, hrevez pal pep unan, àr un destenn pe un atersadenn a-ziàr an danvez-se.

2. Piv ?

Stummour : David ar Rouz, get sikour kelennerion arall àr ar lec'h.

Digor da : razh ar vrezhonegerion adal ar live B1-B2.

3. Feson da labourat ha talvoudegezh

E penn kentañ ar sizhun e vo em soñjet a-stroll àr petra eo ar labour termenografiezh, an doberioù a rank bastiñ dezhe, hag e vo kanniget ur feson d'ober ha benvegoù d'aoziñ ar labour-se.

Goude e vo labourer get pep unan àr an danvez dibabet getoñ mes gellat a rahet labourat a zaou (pe oc'hpenn) ivez, àr un danvez hepken pe ar danvez pep unan, é ranniñ ar renabliñ, ar c'hask, ha razh. Aozet e vo prantadoù « bilañs » da c'houlenn o soñj get ar re 'rall.

Diàr ar sizhuniad labour-se e vo desket ur feson da zibab troidigezhioù evit termenoù, teknikel pe teknikeloc'h, hag an dra-se a servij àr ar pemdez e brezhoneg. Evit lod e vo talvoudus oc'hpenn evit o micher, ma labouront e brezhoneg, lakaomp, pe ma faot dezhe gober ha ne gredont ket agaoz d'ar c'heriaoueg arbennik a vank dezhe.

4. Degasit geneoc'h...

Un **urzhiaer** hezoug ma 'peus unan, get ur skridtreter (hag un taolenn).

Geriadurioù :

- geriadur an Here m'ema geneoc'h, talvoudus-bras eo ;
- ur geriadur divyezhek hollek àr baper a c'hello bout talvoudus ivez, na bout e kaver geriadurioù a sort-se enlinenn ;
- geriadurioù divyezhek hollek rannyezhel ma faot deoc'h chom stag doc'h ur rannyezh bennak ;
- geriadurioù arbennik àr an danvez ho po c'hoant da bleidiñ getoñ.

Ur listennad geriadurioù a gavehet er bajenn « Geriadurouriezh ar brezhoneg » e Wikipedia :
https://br.wikipedia.org/wiki/Geriadurouriezh_ar_brezhoneg hag e Tro ha Distro :
http://www.trohadistro.com/brezhoneg/teskadou_yezh.html.

Ur yezhadur a vo talvoudus ivez evit treiñ un destenn(ig) mard eo ho c'hoant.

EVEZHIADENN : Pleustret e vo war an danvez-se bemdez eus 9 eur betek kreisteiz hag eus 2 eur betek 5 eur goude kreisteiz, a-hed ar sizhun.

Ar stajidi o devo dibabet mont gant ur rummad diouzh temoù ne c'hellint ket kemer perzh er c'hentelioù brezhoneg kinniget diouzh live an dud.